




GUERZ NEVEZ,

EN ENOR HA GLOAR

AR C'HABITEN COZANET,

EUS A LEZARDREO, TOST DA LANDREGUER,

*Pehini en deus bet ar boneur, dre e gourach
vras, da savetai o bue da 198 passager Sauz en
eur vatimant e pehini e voa croguet an tan.*

Var ton Guerz Santez Anna Vened.

TADOU, mamou, bugale, c'houi, dreist oll,
Bretonet,
Oc'h eus etoues tud a vôr qerent pe vignonet,
Prestit hoc'h attantion, en hano cus a Jesus,
Da zelaou gant eves bras eur recit truezus.

Tost da guæra Landreguer, e qæric Lezardreo,
 Eus un hano hirio'n deiz hac en devo ecleo;
 Beza e deus an enor da veza enni ganet
 Exempl ar vartolodet, ar c'habiten Cozanet.

Partiet eus an Haur-Neve d'ober ur veach pell,
 Lancet e creiz ar môr bras, poulset gant an avel,
 Eguis ur güir gabiten hac un den leun agourach,
 Ec'h evessae meurbet e lestr, e equipach.

Un devez, en ur sellet ebars e longuevu,
 Eus a dribord da vabord gant eves a beb tu,
 Hac én remercout pell bras ur poent rus evel
 an tan;
 Ractal e reas cingla da erruout buan.

E lagad flem en lacas neuze incontinent
 Da remercout e voa'n tan ebars eus vatimant,
 Hac én crial a boez penn : courach, courach,
 mignonet !

Nijomp da zouguen sicour eguis güir Vretonet.

Rentet tost d'ar vatimant voa e flam hac e tan,
 Er hanavejont diouc'h-tugant nebeut eus a boan
 E voa carguet a Sauzon o vonet d'an Enezi :
 Un horrol e voa clêvet an estlam hac ar c'hri.

Eur spouron eus ar goassa a voa en equipach ;
 An disesper horrerus o c'hargue a arrach :
 An tan adreus hac ahed voa croguet er vatimant :
 Eur maro cri a velent eno incontinent.

Ar goerniou voa oll garguet eus an dud mal-
eurus ,

An eil var guein eguile , en eur stat horrerus ;
Darn all voa cramponet elec'h maellent cregui,
O sonjal tec'hel demeus eur maro meurbet cri.

Pa dosteas Cozanet eus al lestr anflamet .
E voa eur spont o velet an tan hac ar moguet ;
Mes gementse n'ampech qet hor Breton d'e
gramponi ,
Hac d'en em laqat e stat d'ellout n'em assuri.

Ar c'habiten Cozanet a saill er vatimant ,
Hac a vel un dra horrubl eno bars en instant :
Eur vreg voa er c'hobanou , a blonje , a ziblonje
Dre rouli ar vatimant : peguer spontus voa se !

Eur buguelic voa crapet gant nerz eus e gou-
zoug ,
Daou all dindan e divrec'h a vire ouz peb droug.
Ar c'habiten Cozanet a saveta anezo ,
Hac o disqen gant calz all en e vag voa eno.

Ar vag a voa leun avoalc'h ; pried ar vreg salvet
A glasq antreal er vag , mes re e voa carguet.
Adieu , greg ha bugale ! me zistro d'am batimant
Da vervel o sonch ennoc'h bete coll santimant.

Nan ! nan ! eme Cozanet , ne vo qet lavaret
Eo eur martolod Breton en deus ambandonet
En danjer eus ar maro un tad tener , un tad mad :
Hac e tlefen-me mervel , me ranq ho savetat.

Benediction Doue ra deuy var Cozanet,
 Ha var gement crouadur a vo outàn ganet !...
 En zo un haros christen, enor eus hor Breiz-Izel:
 Ra vo rentet da vigen e hano immortel.

Grac da gourach Cozanet, savelet ê an oll;
 E gonfiand en Doue ra na zeu den da goll.
 An oll Sauzon zo rentet e batimant Cozanet,
 Da drugarecat Doue iot en em unanet.

Guelet a rejot eno ar joa, an drugarez
 Eus an dud savetaet, leun a anaoudeguez
 En andret ar Francisien, pere eus abep amzer
 Zo prest da zouguen sicour d'an olle peb danger.

Conta a rejot diouc'h-tu an dud voa savet et :
 Cant-trivac'h-pêvar-uguent neuze a voe cavet
 Être goaset ha grague, yaouanc, côs, bras ha
 bian ;
 Dre ar c'hraç eus a Zoue, ne vanqe qet unan.

Buan, eme Cozanet, d'ad tan ar chaudieren,
 Ma vo prest d'an dud qèz-mâbara, qig hasouben!
 Roit dê ur banne güin da nerza o c'halonou.
 Peguen eurus on hirio, ô Jesus, va Autrou !

Allòn, autrou'r medecin, pansit ar re vlesset,
 Ha c'houi, va mignon second, hastit ma vint
 güisqet.
 An oll goufrou zo scarzet, peb martolod n'em
 ampres

Da rei o dillat caera da c'holo an dud qèz.

Allas ! itronezet qèz, n'hon eus na rubanou,
Na plumach, na tocou zei, nac ive robeou :
Dalit hor brava dillat, hit e campr ar c'habiten
Vit en em vouisca tranquil, ma voc'h brao ha
qempen.

Ar c'habiten Cozanet, incapapl da ellout
Miret qement all a dud, a chenchas prest a rout;
Gant ar guella bolonte, na elje qet fournissa
Bouedavoalc'h d'an oli dud-se evit dont d'o beva.

Aruout a rejot souden e Rio-Janeiro;
Ar Sauzon a voa eno a zired tro vardro,
Hac a zistribu arc'hant d'ar vartoloded a Franç,
E merq a anaoudeguez hac eus a recompanç.

Da Gozanet e rojont ur montraour arc'haera,
Ha da Rouanez Brô-Sauz ractal voe grêt scrifa.
Officer ar Rouanez neuze' lavaras dezâ :
Grit ho cont, paeet vezo an diner divea.

Ar Sauzon a rayo sur evidoc'h o dever;
Sonjal rint e Cozanet atao e peb amzer,
Ha n'ancounac'hint biqen peguement oc'h bet
humen

En andret o c'henvrois, ouz se bezit certain.

An oll bultinou a Franç hac eus ar vroyou all
O deus comzet gant enor demeus an den leal,
Pehini a vo atao sellet evel ar güir scoüer
Deus an dud vaillant a vôr dre oll e peb amzer.

Autrou'r marichal Grouchi a zo en em hastet
 Da renta ive homach d'exempl ar Vretonet,
 O rei un taç alaouret hac ur vedaillen ive
 Da Gozanet en offranç eus memprou ar pence.

Mes ne meus qet c'hoas achu. Comzomp ouz
 hon Roue,
 Bepret leun a vadelez evit e vugale,
 Ha prest da recompansi an actou eus a vaillanç,
 Gant ur soign eus ar vrassa servicherien ar Franç.

Guelet a ra sclêr patant burzudou Cozanet,
 Ha gant eur joa ar vrassa en deus-én en hanvet
 Diouc'h-tu dre batanten membr legion a enor,
 Hac e cass deàn neuze ar groas vit en decor.

Ministr eus an dud a vôr, an autrou Duperre,
 Carguet eus a guementse eus a bers ar Roue,
 Zo e galon treantet eus a admiration,
 O tont da recompansi Cozanet, güir Breton.

E galon gant ur joa vras a saille en e greiz,
 O tonet da zecori Cozanet, haros Breiz;
 En voe ive martolod goeachal, hep nep soùez,
 Vel an amiral Laland, depute Montroulez.

En eur veuli Cozanet demeus e oll gourach,
 Ec'h admiromp a galon ive e equipach,
 Rac oll o deus grêt preuven demeus a humanite,
 A lealdet, a feiz vad, a generosite.

En amzer demeus ar peoc'h, coulz evel er
 brezel,

Eo bet dign a veuleudi tud a vôr Breiz-Izel :
 Atao o deus soutenet evel güir tud a galon
 Gant eur gourach ar vrassa enor hor pavillon.

Enor da vartolodet hor brô guer Breiz-Izel,
 Pere voe e peb amzer d'hor pavillon fidel ;
 Eur vrô gaer vel hon hini na ell nemet fournissa
 Tud leal ha generus hac ar c'hourajussa.

Na achuimp get hon güierz hep donet da deurel
 Ur fleuren var hanoyou omp fier da henvel ,
 Vartuda vôleus a Vreiz, enor rouantelez Franç,
 Hanavezet dre'r bed oll dre ar brassa vaillanc.

An autrone Primoguet, Cassard, Duguai-
 Trouin,
 Guichen, Cornic, Ducouedic, Bisson ha Tre-
 mintin.....

Mes re hor bez da henvel, ma clasqfemp comz
 oute oll ;
 Daoust d'hon oll bolonte vad, hor memor en
 em goll.

Ur Prinç, ur mab d'ar roue, yaouanc, leun a
 enor,
 Ne voa c'hoas nemet buguel p'en deus redet
 ar mor ;

Hacen deus disquenzet d'ar Françoll abetr voa
 Capabl dre e vaillantis, dirac Sant-Yan-d'Ulloa.

Gloar ra deuyo da vigen varnezo da bara,

Ni dreist-oll, Breiz-Izellis, ni zo just d'emp'enta
 Hon homach agreiz calon da haroset hor vam-bro
 Bezomp oll dign diouto betec heur hor maro.

Enor ha gloar da Zoue, pini ra e pep lec'h
 D'e oll vugale santout ar pouvoar eus e vrec'h,
 Evit ellout n'em sellet evel mat le gür breudeur,
 Ha renta o oll sicour pa guezet er maleur.

O martolodet christen ! ho pet atao ervad
 Ar sonch eus a Gozanet dirac ho taoulagad;
 Ha ra blijo gant Jesus ho qervel evit repos
 Er fin demeus ho puez e gloar ar Barados.

*Cette querz est
 d'Alexandre Lédan
 l'imprimeur.
 (1777-1855)*

FIN.

